



RECIT
COMPOSET VAR MARO

AN DUC DE BERRI.

Var ton : Testament Louis XVI.

BRETONET a Vreiz-Izel, tostait da glêvet
Ur recit so pitoyabl ha truezus meurbet,
A varo an Duc de Berri, ar c'haera Prins a Franç
En eus collet e vuez, siouas, dre ur goal chanç.

Eus a greis e blijadar, pa na zonje netra,
E bried hac én o tont demeus an Opera,
E tremen ur maleurus, hac en deveus plonjet
Ur poignard en e goste, hep rézon na sujet.

Qerqent ha ma voe stêr gant an traitour Louvel;
E losqas ur griaden ractal hep dale pel.
Ar Brincés a gri neuze : courate, va mignon Charles,
Bes confianç en Doue, lean eus a vadelez.

Beuzet eo va daoulagad, ha troublet va speret,
O tont da gonsideri en glac'var e bried,
Ous en guelt discaret ha beuzet en e voad :
Trista situacion, ha goassa calonad!

Ha c'hoas, goude ma coezas, en devoe ar gourach
Da denna eus e goste ar poignard en scoas,
Bet truez ous va ene, va Zalver, me ho ped :
Me a renq souffr ar mato, hep beza meritet.

O clêvet ar propos-màn en deveus prononcet,
E fatiqas he c'halon d'an Duques e bried.
Setu o c'hompagnonet dezolet en antier,
Ous o guelet imobil en ur memes amzer.

Sebelet voent ha douguet o daou er memes cambr,
Elec'h ma voe vizitet gant an dud excelant
A dleye en exanti eus ar maro cruel,
Penevert ma voa scôet dre un tol qer mortel.

Pa ve piqet ar galon e ranqer perissa,
Netra n'en deveus goude capabl da rezista;
An ol Chirujianet o deveus lavaret:
Pa ve blesset ar galon n'en eut muy a remed.

Clasqet e voe ur Bêleg da zonet var e dro,
Mac e cōvessa gantàn ractal e bec'hejou;
Recco e Zacramanchou gant henor ha respet:
Caera consolacion da vont divar ar bed!

Casset voe ur messajer ractal en dro da guær,
Da diguemen d'ar Roue, d'e famil en antier.
Da anonç ar c'hêlou trist, ha dont d'e azista,
E crede e voa ar Prinç en e heur diveza.

En em assabl a rejont, ha dont en ur momet
E vete d'er bizita gant glac'har ha regret,
Ha pa êrujont gantàn e parlante oute,
Bete'r moment diveza ma rentas e ene.

Qenta mennat a c'houlen, pa êrujont gantàn,
E voe d'e assasiner da rêy e c'hraç dezàn,
Na vije qet condaonet da zouffr ar suppliçou
A guement en laqaje da zouffri ar maro.

Hor Zalver en eus souffret calz eus a boaniou bras,
 Goude scuilla e ol voad, eo marvet var ar Groas,
 Da brena hon eneou, entrezomp, pec'herien,
 Hac en deveus pardonet d'e vrassa bourrevien.

O clêvet a preposiou en eueus prononcet,
 E respontas ar Roue : n'en em chagrinit qet;
 Laqit oc'h oll gonfiang en madelez Doue;
 Conservit deomp ho puez; goude ni velo ze.

E bried a recomand d'e famill en antier,
 Da gavet soign anezi ha demeus ar buguel
 Zo entre he daou gostez, pa deuyo var ar bed;
 Rac êru eo an amzer ma vezimp separet.

Hac e verc'h a recomand d'an Duques d'Angoulêm,
 Da ober dêy acquitta he dever a gristen,
 Ha cavet soign anezi qeita ma vo er bed,
 Hac e vezo gant Doue un deiz recompancet.


Ar respont a ro dezàn an Duques d'Angoulêm,
 Entre ma vo en buez, ne vanço birvigen
 Da ober dezi beva en carantez Doue,
 Ha d'e derc'hel en doujanç, bete fin ho bue.

Pa zantas e voa êru en e heur diveza,
 Ec'h ordrenas ma vije pelleet dioutâ
 E bried qèz glac'haret, m'en dije an amzer
 Da c'houl pardon ous Doue, qent donet da vervel.

Peb Christen mad a vije touchet o c'halonou,
 O clêvet an Duc de Berri, qent souffri ar maro,
 O qimiadi truezus eus e famill antier,
 Qent ma zeo bet surprenet gant ar maro cruel.

Pebes desolacion evidomp, Francisien!

Collet bon eus ur Prinç mad voa capabl d'or zouten,
Goulenomp a vouir galon ma vezo curunet
Gant Jesus hac ar Verc'hez en pales an Diindet.



G U E R Z

*Var sujet an distro eus un Den Yaouanq partiet
gant ar Reqizicion gentu.*

Var ton : Va Flaneden so caled.

TOSTAIT oll, tud yaouanq, ha qemerit true
Eus ar blandeden bonner a boez var va bue :
Deut da gemesq ho taelou assambles gant va re,
Da zoulaji va foaniou, deut da voela varne.

Setu deg vloaz tremenet ma zon bet contraignet
D'abandoni va c'herent, va douç, va mignonet,
Evit monet d'ar brezel da zeugen an armo
E faveur al liberte voa prometer d'am bro.

Abaoue qeit-al amzer, ne alfen qet laret
Pet combat ha pet poaniou am eus-me anduret.
Tri c'hant leo am zepare eus va c'herent nessa,
Ha ne meus bet anezo qêlou an distera.

E creis ar c'harnach bemde va buez exposet,
Unan demeus va divrec'h erfin am eus collet,
Hac evit ol recompanç emeus bet va c'honje,
Hep caouet neb passion da veva em c'hontre.

C'hoas laouen o tilezel servich as Republiq,
 N'en deo qet deot va speret da gompren er fatiq
 Eus an hent hir ha poanias am boa-me da ober
 Atoc guelet va zud qer hac êruout er gær.

Collet em eus ar galloud da réy sicout d'am zad,
 Hac o tivoueret va brec'h, n'allin muy labourat;
 Bremàn va zud am mago, pa meus-me c'hoas ar chang
 M'o deus leve hac arc'hant ebars en abondanç.

Setu me dija êru tostiç demeus ar gær;
 Gant ar joa eus va guelet an oll a ray din cher.
 Va zad, va mam, va c'herent, breudeur ha c'hoarezet,
 Ha va mestrezic fidel, oll e vint ravisset.

Bonjour d'êc'h, ô va c'hontré! eurus ên em gavàn
 Galloud c'hoas ho contempli, dont da vervel amàn.
 Va c'halon, gant ar joa, em c'hreiz zo seziet,
 O tostât demeus an ti elec'h m'on bet ganet.

Mes oc'h antreal enni, e zon bet trubuillet,
 Un den dianav dia-me en deus bet din laret:
 Êruet fall oc'h amàn; sortiit, va mignon,
 Ne mèn qet ar mestr er gær, n'o po qet aluzon.

Souezet bras o velet n'anaveyen hini
 Touez qelies personach a oa o ren en ti,
 E meus-me pront respontet: ententit va rêzon,
 Me n'en don qet deot amàn da glasç an aluzon.

Clasç a ràn va c'herent qer er plaç m'on bet ganet;
 Al lec'h-màn a so dezo, amàn cun bet maget.
 Lavarit dia, me ho ped, pelêc'h en o c'havin:
 Ne zefot netra qen din evit va c'hontantin.

An den-màn a so follet, int comancet crial :
 N'en deo qet mab d'or mestr-ni, ret eo er chasseal,
 Guelet ho pije neuze ur vanden mevellyen
 O tiredec gant bizier d'am chasseal souden.

O sortial gant glac'har ha beuzet em daelou,
 Da glasq va zud elêc'h all, pe clêvet o c'hêlou,
 En hent e zon bet scôet vel gant un tol curun,
 Pa meus-me hanavezet voa collet hor fortun.

Souden em eus rancontret va c'hoar ar yaouanqa
 Ur zac'hic staget outi, o c'houlén he bara.
 O clasq compren er maleur varnomp-ni diguezet,
 Va speret zo bet troublet, ha va c'halon mantret.

O Doue oll-buissant! roit din oc'h assistanç,
 Roit din an nerz da glêvet penos ho Providanç
 He devezus bet permetet, evit hor c'hastia,
 Ma zomp-ni bet distolet er stad an horrupla.

Va c'hoariq paour, me ho ped, soulajit va mizer,
 Hast bras am eus da glêvet qêlou deus va zad qêr,
 Hac eus ar vamiq tener he devezus hor zavet:
 Mervel a ràn en defot o zerc'hel ambrasset.

Siouas dit, va breuriq paour, ne oufes qet compren
 Pegen bras eo hor maleur, peguer bras hon anqen.
 Allas! ouспен hor madou a renqomp divoueret :
 Hor c'herent carantezus zo bet deomp rivisset.

En despet d'al lezennou grêt gant ar Republiq,
 Hon tad voa chomet fidel d'an Ilis Catholiq;
 Rac-se gant hon tirantet e zeo bet condaonet
 Da bignat var ar chafot da veza dibennet.

Prestiq goude, hor madou a zo bet confisquet,
 Hac ive, prestiq goude, siouas! int bet guerzet.
 Consumet gant ar chagrin deus qement a gollo,
 Hor mam a zo bet neuze scôet gant ar maro.

Sessit, va c'hoar, da barlant; sessit d'am dezoli,
 Re am eus var an douar a dourmant hac anui.
 Er moment mac'h esperen comanç beva eurus;
 En em gavàn, va Doue! muyoc'h-muy maleurus.

Goude beza servichet ar Republiq ingrat,
 He deus, d'am recompaci, gillotinet va zad,
 Laqet va mam da vervel dre nerz an dizesper,
 Ha guerzet va oll vadou; n'em bo nemet mizer.

Dious an tourmanchou garo a stourm eus va speret,
 Pelêc'h caout soulajamant, pelêc'h caouet remed?
 Ar plac'h he deus captivet a bell va zantimant,
 A zoulajo va hirvoud gant he c'homzou charmant.

Varzu ti va mestreziq e zàn gant esperanç
 Caout en he fidelite remed eus va zouffranç:
 Bonjour dêc'h, va rouanez; setu me deut er vro;
 Ancouêt eo va oll boaniou mar am c'harit ato.

Me zo FANCHIC, ho mignon, distro eus ar brezel,
 Hac a zo en peb amzer chomet dêc'h-u fidel.
 Demeus va oll garantez ebars en oc'h andret,
 Em eus bremàn esperanç beza recompancet.

Petra, paour-qez ruzudic, clasqit-u em c'hever?
 Biscoas n'em eus ho quelet, na deziret ober.
 Biscoas n'em eus ho caret, na birviquen n'er gràn,
 Na setu, en ber gomzou, ho setanç divezàn.

Me zo an den maleurus, ne gaset get e ban.
 Mil guech milliget an heur m'on deit var an douar!
 Oll gouliou va c'haloa zo nêve digoret,
 O veza bet rebutet gant va muyad caret.

Va mestrez ous va guelet couezet en paourente,
 Nijet he fromessaou, nijet he c'barante.
 Esperanç va eurusted, allas! zo tremenet,
 Evel ma ra un ure en nos dre hor speret.

An exempl-mân, tud yaouanq, a deu d'oc'h instrui
 Pegen dister ar bed-mân, leun a ingrateri.
 Epad ma zoc'h p'vidiq, gant an oll oc'h caret;
 Mes mar tro rod ar fortun, adieu ar mignonet.

Petra rân var an douar? Collet va mam, va zad,
 Va mestrez ha va madou, va brec'h da labourat?
 O vervel pe o veva er c'hoad gant al loened,
 Rin guelloc'h vit implori amân fos mignonet.

Er c'hozjou an tevalla o tont d'en em guzat,
 Maget vin gant va glac'har, hac eus va daoulagad
 E tiredo an daelou da drec'hi va zec'hed,
 Betec ar moment eurus ma quittain ar bed.

F I N.

E MONTROULEZ, e ti LEDAN, e traon ru ar Vur.